



Ar vuhez e-maez ar c'hentelioù pe penaos labourat, kousket, kaout dudi ha bevañ a-gevred?

DAOUST D'O DEVEZHIOÙ BEZAÑ LEUN-CHOUK E CHOM UN TAMM MAT A AMZER DIEUB GANT AL LISEIDI GOUDE O C'HENTELIOÙ, KEN O DEUS DA VERAÑ WAR UN DRO O LABOUR RET, AR PRANTADOÙ DISKUIZHAÑ, AN DUDIOÙ HA DESKIÑ IVEZ PENAOS BEVAÑ GANT AR RE ALL. SKI-PAILH KAS EN-DRO AL LISE (2 BENNKASOUR HA 13 KASOUR(EZ) -SELLOUT OUZH O FOLTRIJI PELLOC'H) A ZO BET RENEVEZET C'HOAZH EN DISTRO-SKOL-MAÑ PA 'ZEO BREMAÑ 380 LI-SEAD(EZ) A ZO E LISE DIWAN KAREZ BEMDEZ HA BEP NOZ (191 LISEADEZ HA 189 LISEAD).

Setu penaos 'ta 'vez aozet ar Vuhez A-Gevret war ar pemdez ?

Evel kement aozadur hag a ra e vicher degemer tud evit ur sizh-un a-bezh noz deiz, skipailh Kas en-dro al Lise en deus end-eeun da respont da ezhommoù diazev ar re a vez roet bod dezho : ar boued, ar bod, ar yec'hed hag ar surentez. Daou vodad a zo hag a ra war-dro an 2 ezhomm kentañ o terc'hel kont evit pep hini anezho eus doareoù an 2 ezhomm all hag a vod, ouzhpenn tud ar skipailh, dileuridi al liseidi, dileuridi ar familhoù ha dileuridi L'ailles hag a zo ar gevredigezh a ver al Lise evit kont ar Rannvro :

Ma vez kaoz, er **bodad BOUED**, eus talvoudegezh, eus kementad hag eus liesseurted ar meuzioù, e vez kaoz ivez eus yec'hed hag eus meuzioù rekis, bio h.a .. hag eus doareoù da verañ ar servij-pred da vintin, kreisteiz ha noz (evezhiañ hag ober galv, roll tremen ar c'hlasoù..).Hirroc'h a gaoz avat a veze er **bodad BOD**, diwar-benn aozadur ar c'hambreier, ar menaj, an urzh da gaout, al labourioù da zresañ pe da gempenn al lec'h hag ivez diwar-benn ar reolennoù surentez (bilañs ar galvoù-tan trimiziek...) pe c'hoazh diwar-benn ar reolennoù diabarzh a-zivout ar galv diouzh noz er c'hambreier hag an eurioù diskuizh bemdez : Gouloù lazhet ha didrouz da vat a c'houlennomp groñs evit an holl da 10 e 30 noz (22 e 30) daoust ma c'hell bezañ gouzañvet e labourfe an derminidi diwezhatoc'h. Klask a reomp ober a seurt ma vefe 8 eurvezh kousk evit al liseidi eilvet. Digoret e vez an huñva d'ar merc'her adalek 3 e 30 (15e30) GM ha lod anezho a c'hell neuze ober ur pennad kousk. Evezhiañ ar c'houkvaoù a ra 5 kasour(ez) bep noz : unan war pep estaj, er c'houkvaoù merc'hed koulz ha re ar baotred + div gasourez diouzh an noz hag ar mintin evit sikour kostez ar merc'hed + ur pennkasour war evezh a bep eil. Evit a sell ouzh ar surentez, e vez evezhiet al lise penn-da-benn bep 3 bloaz. Evit a sell ouzh ar yec'hed omp lakaet nec'het un tamm er bloaz-mañ gant diouer ar ve-disined e-kêr Karaez padal n'hon devo ket muioc'h a blas er c'hlañvdi, ha nec'het omp ivez gant reolennoù nevez CHU Karaez evit a sell ouzh kemer hol liseidi e karg, pezh en deus lakaet ac'hanomp da adsevel un doser yec'hed evit pep lisead a-fet aotreoù (sinadur an tad hag ar vamm rekis dre ret evit oberata hag ivez evit mont' maez goude).

Met ouzhpenn ober war-dro yec'hed ha surentez al liseidi e kemer perzh skipailh Kas en-dro al Lise e krouiñ o buhez so-kial ha keudad da zont hag en deskiñ dezho ledanaat o emre-nerezh : 3 emvod bloaz ar C'Huzul-Lise ma voder ouzhpenn ar skipailh, dileuridi al liseidi ha dileuridi familhoù pep live, a zo alies re verr evit ma vefe tabutet en enno an holl ezhom-moù eskemm diwar-benn aozadur al labour noz (studioù-sel-led ouzh aozadur ar studi-noz, digeriñ salioù da labourat a-stroll..) betek doareoù nevez al labour hag an dudi o cheñch dre ma kresk niver an dud el Lise (salioù nevez, plas el le-vraoueg,..) en ur dremen dre ar reolennoù nevez da sevel ha da vezañ kinniget d'ar renerezh (Reolennaoueg diabarzh) ouzhpenn rentaoù-kont ar C'Huzulioù savet diwarnañ hag aze ez eus 3 anezho :

- ar **C'huzul Kelaouiñ** ma voder hepken ar pennkasour, ar penngelenner, al lisead hag e familh, pa ne 'z eus kaoz nemet eus adkelaouiñ diwar-benn ar reolennaoueg evit abegoù munut.
- ar **C'huzul Kuzuliañ** ledanaet, ma voder pa c'houlenn ar Reolennaoueg hen ober, ar pennkasour, ar penngelenner, dileuridi ar skipailhoù pedagogel ha kas en-dro, dileuridi liseidi al live, dileuridi familhoù al live hag al lisead(ez) hag e(he) familh. Ar C'Huzul-se eo a vez bodet an aliesañ diwar mellad 10,a ar reolennaoueg.
- ar **C'huzul Reoliañ**, kalz pounneroc'h da lakaat en e sav rak reoliet gant al lezenn, e-lec'h ma vez ivez ar rener, ouzhpenn ar pennkasour, dileuridi ar skipailhoù pedago-gel ha kas en-dro, dileuridi liseidi al live, dileuridi familhoù al live hag al lisead(ez) hag e(he) familh hag o difennerien ma 'zeus diouto hag e-lec'h ma vez divizet, gant ma vo ar c'horum, dre ur votadeg kuzh, an dalc'h kastiz raktreset gant al lezenn. Ar C'huzul Reoliañ a vez bodet evit ar gwalloberioù grevusañ raktreset el lezenn. Dileuridi ar familhoù, evel dileuridi al liseidi en daou guzul diwezhañ a zo dileuridi dilennet bep bloaz er C'huzul Lise hag anat d'an holl hon eus ezhomm eta eus ar familhoù evit al labour er bodadoù koulz hag er c'huzulioù-mañ.

Er C'Huzul Lise eo e vez kaoz ivez eus roll an diarbennoù a vez kaset war-raok a-vloaz da vloaz a-fet drammm, alkohol ha butun, ar c'houkved, an darempredoù paotr-plac'h, binvioù an ekonomiezh niverel... hag all.

Evit mont e darempred gant al lise

Mar plij ganeoc'h, implijit ar chomlec'h postel : lise.diwan@orange.fr.

Digor eo ar sekretourva etre 8e30 mintin ha 5e (17e) d'abardaez war-bouez ar merc'her (betek kreisteiz)

Pellgomz : **02 98 99 36 73** Pelleiler 02 98 99 36 45

Pellgomz boutin (dre hanterouriezh al liseidi) : 02 98 93 75 86





LA VIE EN DEHORS DES COURS

comment concilier travail, repos, loisirs et vivre ensemble?

BIEN QU'ILS (ELLES) AIENT DES JOURNÉES BIEN REMPLIES, LES LYCÉEN(NE)S DISPOSENT DE TEMPS LIBRE EN DEHORS DES COURS OÙ ILS (ELLES) DOIVENT CONCILIER LE TRAVAIL NÉCESSAIRE, LE REPOS OBLIGATOIRE, LES LOISIRS ET LE NON MOINS NÉCESSAIRE APPRENTISSAGE DU VIVRE ENSEMBLE. L'ÉQUIPE D'ANIMATION ET DE VIE SCOLAIRE (2 CPE ET 13 ANIMATEURS(TRICES)- VOIR TROMBINOSCOPE) S'EST ENCORE RENOUVELÉE LORS DE CETTE RENTRÉE 2017 CAR 380 LYCÉEN(NE)S FRÉQUENTENT DÉSORMAIS LE LYCÉE DIWAN DE CARHAIX (191 LYCÉENNES ET 189 LYCÉENS).

Alors Vivre Ensemble au quotidien : comment cela s'organise ?

Comme dans toute structure qui accueille du public en internat durant une semaine jour et nuit, l'équipe d'animation est directement concernée par la satisfaction des besoins fondamentaux : l'alimentation, l'hébergement, la santé et la sécurité. Deux commissions existent pour les deux premiers qui intègrent chacune les problématiques des 2 derniers et qui associent outre l'équipe, les lycéen(ne)s délégué(e)s, les familles déléguées et l'Aile, l'association de gestion du lycée pour le compte de « La Région » :

Si dans la **commission « RESTAURATION »**, il est souvent question de qualité, quantité, diversité des menus, il est aussi question de santé et de menus spécifiques, bio etc..) et de gestion des services de repas matin, midi et soir (appels, surveillance, cohérence plannings..) tandis que pour la **commission « HÉBERGEMENT »**, il sera plus question de l'aménagement des lieux, du ménage, du rangement et des travaux et réparations ainsi que des règles de sécurité (bilan des exercices incendie..) ou encore du règlement intérieur concernant les appels du soir ainsi que le repos quotidien : L'extinction des lumières et le silence total dans l'internat est exigé pour tou(te)s à 22h30 même si une tolérance subsiste pour les élèves de Terminale qui souhaitent travailler plus tard (mais en silence). Nous essayons de garantir un minimum de 8 heures de sommeil pour les élèves de Seconde. L'internat est ouvert le mercredi après-midi après les cours (15h30) et quelques élèves en profitent pour se reposer. La surveillance de l'internat est assurée par 5 animateurs(trices) chaque nuit : un(e) par étage de chaque internat (gars ou filles) + deux animatrices le soir et le matin pour soulager les deux étages de l'internat filles + un CPE d'astreinte par nuit. Coté sécurité, l'établissement est entièrement contrôlé tous les 3 ans et le dernier contrôle date de mai 2016. Coté santé, nous subissons cette année une baisse du nombre de praticiens sur Carhaix alors que notre capacité en infirmerie n'augmentera pas ainsi que de nouvelles règles concernant la prise en charge des jeunes au niveau du CHU, qui nous ont amené à revoir le dossier médical des jeunes en termes d'autorisations (nouveau protocole : signatures indispensables des 2 parents pour interventions et sorties du CHU).

Au-delà de veiller à la santé et à la sécurité des lycéen(ne)s, l'équipe d'animation est aussi concernée par la construction de leur vie sociale et citoyenne et l'apprentissage de leur autonomie: Les 3 réunions annuelles du Conseil de Vie Lycéenne qui associe outre l'équipe, les lycéen(ne)s délégué(e)s et les familles déléguées de chaque classe sont souvent trop courtes pour évoquer tous les besoins de discussion qui vont de l'organisation du travail du soir (études- voir organisation des études, ouverture de salles pour faciliter l'entraide...) aux conditions de travail et de loisirs qui évoluent avec la croissance du lycée (nouvelles salles, place au CDI etc..), aux autorisations de sortie en passant par l'élaboration de nouvelles règles de vie destinées à être proposées à la Direction (Règlement intérieur) ainsi que le compte-rendu des différents Conseils siégeant en application de ce même Règlement. Ceux-ci sont au nombre de trois :

- Le Conseil d'Information, qui réunit, lorsque l'enfreinte au règlement donne lieu à un simple rappel à l'ordre, le CPE, le professeur principal, le lycéen et sa famille.
- Le Conseil d'Education (ou de Conciliation) Elargi qui réunit, lorsque le Règlement le prévoit, le CPE, le professeur principal, les délégués des équipes pédagogique et vie scolaire, les délégués lycéen(ne)s du niveau, les délégués parents du niveau ainsi que le lycéen et sa famille. C'est le Conseil qui se réunit le plus souvent en particulier en application de l'article 10.a du règlement intérieur.
- Le Conseil de Discipline, beaucoup plus formel car réglementaire où siège également le Directeur, outre le CPE, les délégués des équipes pédagogique et vie scolaire, les délégués lycéen(ne)s du niveau, les délégués parents du niveau et où la décision est obtenue si quorum constaté, par vote à bulletin secret . Le Conseil de Discipline est réuni pour les cas les plus graves prévus par la loi.

Les parents délégués comme les lycéen(ne)s délégué(e)s dans ces deux derniers Conseils sont ceux délégués au Conseil de Vie Lycéenne et pour tous ces aspects et ce travail en Commissions et/ou Conseils nous avons impérativement besoin des familles.

Au **Conseil de Vie Lycéenne** se discute aussi l'ensemble des actions de prévention que nous menons en matière de prévention contre les addictions, d'information sur les relations garçons-filles, le sommeil, les outils numériques etc...



Pour contacter le lycée

Privilégiez les contacts par mail à lise.diwan@orange.fr
Secrétariat ouvert de 8h 30 à 17h sauf le mercredi de 8h 30 à 12h
Téléphone : **02 98 99 36 73** fax : 02 98 99 36 45
Point-phone (par l'intermédiaire des lycéens) : 02 98 93 75 86